

**petra'sonj an iliz  
diwar - benn  
ar minorelezhiou ?**

**Kemennadur ar Paol  
a-benn Devezh meur  
ar Peoe'h 1989**

---

**L'Eglise et les Minorités**

**MESSAGE DU PAPE J.- P. II  
pour la Journée de la Paix  
8 Décembre 1988**

## AVANT-PROPOS

On trouvera ici le texte intégral du plus récent document exposant la position officielle de l'Eglise catholique concernant le problème si délicat des minorités. Nous pensons que ce Document nous concerne, et nous adhérons sans réticence aux principes qui y sont développés.

Nous voulons les proposer à tous ceux qui habitent la Bretagne.

= Nous le proposons aux **NON-CATHOLIQUES**, pour qu'ils puissent

- faire la distinction entre la position officielle de l'Eglise et les attitudes très diverses des catholiques ;
- saisir le vrai sens de l'action de nos deux groupes ;
- éventuellement, s'inspirer, sur quelque point, des directives catholiques.

= Nous le proposons à ceux des habitants de la Bretagne qui restent sans assumer leur identité dans le sens d'une continuité par rapport à la Bretagne historique, en particulier sur les plans culturel et linguistique, pour qu'ils puissent

- constater que l'Eglise catholique reconnaît la légitimité de leur option ; (cf. n.11, § 2)
- se rendre compte que l'option inverse est tout aussi légitime et digne de respect, en théorie et en pratique.

= Nous le proposons aux **CATHOLIQUES**

- pour que leurs attitudes puissent se trouver en conformité avec leur identité de catholiques ;
- en particulier, et principalement, pour qu'ils puissent reconnaître la légitimité de l'option prise par ceux de leurs frères qui veulent maintenir et développer la **minorité** que constitue, à leurs yeux, la Bretagne, dans la ligne des **droits** et des **devoirs** que lui reconnaît officiellement l'Eglise catholique ;
- pour qu'ils puissent favoriser la prise de conscience du **respect**, sur les plans juridique et social ,auquel a droit la minorité bretonne (\*).

BELEION BREIZH et KRISTENION BREIZH

(\*) Il est évident que le Document romain, si abstrait, exige des commentaires qui, nous l'espérons, seront apportés ultérieurement.

## RAKLAVAR

An Diell nevesañ bet aozet da zisplegañ menoz kefridiel an lliz katolik diwar-benn kudenn ken amjestr an isdarnadoù-tud a vo kavet amañ en he fezh.

Hor c'hredenn eo e sell ouzhimp an Diell-se, hag hep ginañ e roomp dezhi hon asant.

Da holl annezidi Breizh e fell dimp he c'hinnig.

= D'an **NANN-GATOLIGED** he c'hinnigomp, a-benn ma c'hellint :

- lakaat diforc'h etre menoz kefridiel an lliz ha stummoù-emzalc'h liesseurt ar gatoliged ;
- meizañ ster gwirion oberiantiz hon daou rumm-studi ;
- diouzh ma trofe, kemer atiz diwar hini-pehini eus menoziou-heñchañ ar gatoligezh.

= D'ar re eus **annezidi Breizh a chom hep** kemer ar bec'h eus o fersonelezh war arroud ur c'henderc'hel e-keñver ar Vreizh istorek, dreist-holl war live ar c'hultur hag ar yezh, d'ar re-se e kinnigomp an Diell-mañ, a-benn ma c'hellint

- merzout ez eo anzavet dezho gant an lliz katolik an aotre-diwar-wir da zerc'hel d'o dibab (kv. n.11,§ 2) ;
- merzout ez eo an dibab enepsteriek aotreet kenkoulz-all diwar-wir ha ken dellezek-all da vezañ doujet, war live ar meno ha war hini ar pleustr.

= D'ar **GATOLIGED** e kinnigomp an Diell

- a-benn ma c'hello o emzalc'hiou mont da glotañ gant o fersonelezh a gatoliged ;
- en un doare ispisiañ, ha dreist pep tra, a-benn ma c'hellint anzav penaos ez eo aotreet-diwar-wir an dibab graet gant ar re eus o breudeur a fell dezho derc'hel en e sav ha lakaat da zispakañ an isdarnad-tud maz eo, war a predont, Bro-Vreizh, war arroud ar gwirioù hag an dleadoù a zo anzavet outañ gant an lliz katolik ;
- a-benn ma c'hellint reiñ harp da skignañ dre ar vro ar skiant eus an doujañs, war live ar vuhez kevredel, a zo dleet d'an isdarnad-tud maz eo Breizh.

Anat eo he deus Diell Roma,  
ken difetis ha maz eo,  
ezhomm da vezañ staget  
outi diskleriadurioù

hag hon eus ar spi da zegas  
dezhi a-c'houdevezh.

BELEION BREIZH ha KRISTENION BREIZH

## Introduction.

1. - « Depuis le XIX<sup>e</sup> siècle, selon une tendance qui s'est accentuée et répandue un peu partout, les hommes d'une même origine veulent être indépendants et former une seule nation. Pour divers motifs, cela n'est pas toujours réalisable, et il s'ensuit que des minorités sont souvent incluses dans le territoire national d'une autre ethnie, ce qui soulève de graves problèmes». (Encyclique *Pacem in terris*, III)

Par ces paroles, mon prédécesseur Jean XXIII formulait, il y a vingt-cinq ans, l'une des questions les plus délicates de la société contemporaine, question qui devient de plus en plus urgente au fur et à mesure que passent les années car elle concerne aussi bien l'organisation de la vie sociale et civile à l'intérieur de chaque pays que la vie de la communauté internationale.

C'est pourquoi, quand j'ai voulu choisir un thème spécifique pour la prochaine Journée mondiale de la paix, j'ai pensé qu'il fallait proposer à la réflexion de tous le problème des minorités, car nous sommes tous conscients que « la paix - comme l'a dit le Concile Vatican II - n'est pas une pure absence de guerre et elle ne se borne pas seulement à assurer l'équilibre de forces adverses » (Const. past. *Gaudium et spes*, n.78), mais c'est un processus dynamique qui doit tenir compte de tous les éléments, de ceux qui favorisent la paix comme de ceux qui la troublent.

Il est incontestable qu'en cette période de détente internationale, due à des ententes et à des médiations qui font entrevoir la possibilité de solutions pour des peuples qui sont victimes de conflits sanglants, la question des minorités prend une importance croissante et constitue donc, pour tous les dirigeants politiques, pour les responsables de groupes religieux et pour tous les hommes de bonne volonté, un objet de réflexion attentive.

2. - Aujourd'hui, dans la plupart des sociétés, il y a des minorités, des communautés qui tirent leur origine de diverses traditions culturelles, de l'appartenance à une race ou à une ethnie, de croyances religieuses ou encore de vicissitudes historiques ; certaines existent de longue date, d'autres se sont constituées plus récemment. Leurs situations sont tellement différentes qu'il est quasiment impossible d'en tracer un tableau complet. D'un côté, il y a des groupes, même très peu nombreux, qui sont capables de préserver et d'affirmer leur identité et qui sont bien intégrés dans les sociétés auxquelles ils appartiennent. Dans quelques cas, ces groupes minoritaires réussissent même à imposer leur domination sur la majorité dans la vie publique. D'un autre côté, on observe des minorités qui n'exercent aucune influence et qui ne jouissent pas pleinement de leurs droits, se trouvant même dans une situation de souffrance et de malaise, ce qui peut conduire ces groupes ou à une résignation passive, ou à un état d'agitation allant jusqu'à la rébellion. Cependant, ni la passivité ni la violence ne sont des moyens aptes à créer les conditions d'une paix authentique.

## KEMENNADUR AR PAB, A-BENN LIDDEVEZH HOLLVEDEL AR PEOC'H 1989

### AN DOUJANS D'AN ISDARNADOU-TUD

Danvez ar C'hennnadur : ar c'hudennou amjestr a c'hoarvez war dro an isdarnadoù-tud.

1. - « Abaoe an XIX<sup>e</sup> kantved, ez eus aet war gresk ha war emledañ, un tammig dre holl gorniou ar bed, un doug politikel diarvar, hag a laka an dud eus an hevelep orin da c'hoantaat bezañ dizalc'h hag en em lakaat o-unan e stuz a-ziforc'h ur vroad. Met, peogwir, diwar a bep seurt abegoù, ne c'hell ket kementse bezañ sevenet bewech, e tinaou ac'hano maz eus isdarnadoù kenelel a dud hag a vez alies kaeliet e-barzh harzoù broadel ur rumm kenelel disheñvel, ha se a gas da gudennou amjestr-meurbet ». (Lizher kelc'hiadel "Pacem in terris, n.94)

Gant ar gerioù-se, pemp biaoaz warnugent a zo, eo en deus ar Pab Yann XXIII, va diarao-gad enorus, lakaet war wel unan eus ar c'hudennou amjestr a ra gaou ouzh ar gevredigezh a-vremañ, ur gudenn hag a zo deuet zoken, gant an amzer o vont e-biou, mallusoc'h c'hoazh, abaoe ma vez lakaet ul liamm etrezi hag aozdigezh ar vuhez kevredel ha keodedel e diabarzh pep bro, koulz hag etrezi ha buhez ar gedunelez ar etrevroadele.

En ur zibab un danvez-prederiañ dioutañ e-unan, a-benn Liddevezh hollvedel ar Peoc'h, ez eo en abeg da-se e soñjan ez eo dereat kinnig d'an holl, da brederiañ warni, kudenn an Isdarnadoù-tud. Rak holl e verzomp ervat penaos, evel m'hen lavar fraezh eil Sened hollvedel ar Vatikan, « ne deo ket ar peoc'h an diouer nemetken a vrezel, ha ne c'hell ket kennebeut bezañ krennet endro nemetken d'ur c'hempouez a c'haloud miret divrall etre enebbourion ». (G. et S., n. 78) Ar peoc'h, kentoc'h, a zo un heuliad nerzhoberius a gammelodù, e-lec'h ma tleer lakaat er gont e-leizh a rakdivizadurioù hag a elfennou-oberiañ, hag a c'hell, pe mont a-du gantañ, pe lakaat freuz ennañ.

E-kerz ar marevezh-mañ a zistennadurezh etre ar broadoù, o tont diwar emglevioù ha kejadennoù-hanterourion, hag a ro tro da zemwe-lout e veze gellet kaout un diskoulm evit pobloù gwazh eus tabutoù gwadus, n'eus tu ebet da zislavarout e teu da gudenn an isdarnadoù-tud ur pouez o vont war gresk. Mont a ra eta ar gudenn-se, evit ar pennadurezhioù politikel, evit dleadeion ar rummoù relijiel, hag evit an holl dud a youl vat, da ober danvez d'ur stumm evezhiak a bredererezh.

2. - E stumm kedunelezhoù hag a zo dezho da orin, ez diforc'h, hengounioù sevenadurel, un hêrezh gouennel pe genelel, kredennou relijiel, arnodadurioù istorel, er stumm-se ez eus, hiziv, rummoù darnadel e kement kevredigezh a zo, pe dost. Darn a gilbign pell-bras en amzervezh, darn a zo yaouank an orin anezho. Ken liesstumm eo ar stuzioù m'emaïnt o vevañ enno, maz eo, koulz lavarout dic'hallus tresañ un daolenn glok anezho. Diouzh un tu, ez eus rummoù, zoken hiniennoù bihan-tre, hag a zo

Par ailleurs, certaines minorités connaissent une autre expérience : la **séparation** ou la **marginalisation**. Il est vrai que parfois un groupe peut choisir librement de vivre à part afin de protéger sa **culture** propre, mais il est vrai aussi que bien souvent les minorités se trouvent face à des **barrières** qui les isolent du reste de la société. Dans un tel contexte, tandis que la minorité tend à se replier sur elle-même, la population majoritaire peut adopter une attitude de **rejet** du groupe minoritaire, que ce soit à l'égard de l'ensemble ou à l'égard de ses divers éléments. Si tel est le cas, ni le groupe minoritaire ni ses membres ne sont en mesure de contribuer activement et de façon créatrice à bâtir la paix sur l'acceptation des différences légitimes.

### Principes fondamentaux.

3. - Dans une société nationale composée de divers groupes humains, il y a deux **principes** communs auxquels il est impossible de déroger, et que l'on doit même placer à la base de toute organisation sociale.

Le premier principe est la **dignité inaliénable de chaque personne humaine, sans aucune distinction** fondée sur son origine raciale, ethnique, culturelle, nationale, ou sur sa croyance religieuse. Personne n'existe pour soi-même, mais chacun trouve sa pleine identité par rapport aux autres, personnes ou groupes ; on peut en dire autant des groupes humains. Ceux-ci, en effet, ont un **droit à l'identité collective qu'il faut protéger**, conformément à la dignité de chacun des éléments de ces groupes. Ce droit reste intact même si le groupe, ou bien l'un de ses membres, agit contre le bien commun. Dans ce cas, ce que l'on considère comme une action illicite doit être soumis à l'examen des autorités compétentes, sans que pour autant l'ensemble du groupe soit condamné car ce serait contraire à la justice. A leur tour, les membres des minorités ont l'obligation de traiter les autres avec le même respect et le même sens de la dignité.

Le deuxième principe concerne l'**unité fondamentale du genre humain**, dont l'origine remonte à un Dieu unique et créateur qui, selon le langage de l'Ecriture sainte, « d'un principe unique a fait tout le genre humain pour qu'il habite sur toute la face de la terre » (Ac 17,26). L'**unité du genre humain** suppose que toute

gouest da virout dibistig ha da ziskuliañ fraezh o fersonelezh o-unan, hag enframmet ez int azoare e-barzh ar c'hevredigezhioù m'emaïnt en o dalc'h. E degouezhioù 'zo, seurt rummoù isdarnadel a zeu zoken a-benn da lakkat da bouezañ o mestroni war an usdarnad, e-kerz ar vuhez foran. Diouzh an tu all, e vez gwelet isdarnadoù hag a chom hep kaout levezon hag hep gellout en em vataat ez klok eus o gwirioù ; en em gavout a reont, kentoc'h, e stuziù a c'houzañvidigezh hag a zienez. Se a c'hell o bountañ, pe war-du ur c'houzañvusted dizobriant, pe war-du an difretañ, ha zoken an dispac'hañ. Koulskoude, nag ar c'houzañvusted nag an drouknerzh n'eus anezho an hent a zere, diouzh krouiñ ar rakstuziù d'ur peoc'h gwirion.

Hiniennou eus ar rummoù isdarnadel a ren un arnod all : hini an emzisrannañ pe hini an distaolidigezh. E-keit ha maz eo gwir e c'hell, a-wechoù, ur rumm dibab, a-ratozh, chom a-ziforc'h, gant ar youl da wareziñ e zoare-bevañ e-unan, ez eo aliesoc'h e vez an isdarnadoù lakaet dirak klouedoù oush o mirout a-ziforc'h diouzh ar peurrest eus ar gevredigezh. En ur seurt kendegouezh, e-keit ha maz eo douget ar rumm isdarnel d'en em gaeliañ ennañ e-unan, e c'hell ar rumm usdarnel magañ ur santadur a zistaolusted e-keñver ar rumm-se en e bezh, pe e-keñver izili anezhañ a-hiniennou. Pa c'hoarvez kement-mañ, ar re-mañ ne vezont mui e tro, na diwar oberiañ na diwar grouiñ, da zegas o lod da lakaat war-sav ur peoc'h harpet war an asant degemerus e-keñver stummoù reizh a ziforc'h.

### Daou bennvenoz diazez.

3. - E diabarzh kevredigezh ur vroad, o vont d'hec'h ober meur a seurt rummoù-tud, ez eus daou bennvenoz n'eus tu ebet da chom hep o mirout, hag a ranker, zoken, lakaat da ziazez da bep frammadur kevredel.

An hini kentañ eus ar pennvenozioù-se eo ar vriegezh, tu ebet d'he lemel digantañ, a zo da bep personenn, hep diforc'h ebet diazezet war an orin diwar ouenn, diwar gultur, diwar vroad, pe war ar gredenn relijiel. Den ebet ne vez anezhañ evitañ e-unan hepken, met pep den a zeu dezhañ e bersonelezh klok diwar vezañ e darempred gant ar re all. Kement-all a c'heller lavarout a-zivout ar rummoù-tud. Ar re-mañ, e gwirionez, o deus ar gwir da gaout o fersonelezh strollel hag a dleer gwareziñ, e-keñver briegedh pep hini eus izili ar rummoù-se. Divoulc'h e chom ar gwir-se, ha pâvefe ur rumm, pe unan eus an izili anezhañ oc'h oberiañ a-enep d'ar c'henvad. En degouezh-mañ, ar pezh a vez kemeret evit bezañ enepgwir a rank bezañ burutellet gant ar pennadurezhioù barrek diouzh-se, hep ma vije, diwar-se, droukvart ar rumm en e bezh, ar pezh a vije a-enep d'ar reizhded. Diouzh o zu, izili an isdarnadoù a zo dleet dezho ober oush ar re all gant an hevelep doujañs hag an hevelep skiant war graf ar vriegezh.

Talvezout a ra an eil pennvenoz war dro unded a-zon gouenn an dud, an orin anezhi o

l'humanité, dépassant ses divisions ethniques, nationales, culturelles, religieuses, forme une communauté sans discrimination entre les peuples, et qu'elle tende à la solidarité mutuelle. L'unité exige également que les diversités des membres de la famille humaine soient mises au service d'un renforcement de cette unité, au lieu de constituer un motif de division.

L'obligation d'accepter et de protéger la diversité n'est pas réservée à l'Etat et aux groupes. Chaque personne, comme membre de l'unique famille humaine, doit comprendre et respecter la valeur de la diversité entre les hommes et l'ordonner au bien commun. Une intelligence ouverte, désireuse de mieux connaître le patrimoine culturel des minorités avec lesquelles elle entre en contact, contribuera à éliminer les attitudes inspirées par des préjugés qui font obstacle à de saines relations sociales. Il s'agit là d'un processus qui doit être continuellement poursuivi, car de tels comportements renaissent trop souvent sous de nouvelles formes.

La paix à l'intérieur de l'unique famille humaine exige un développement constructif de ce qui nous distingue comme individus et comme peuples, de ce qui représente notre identité. D'autre part, elle requiert que tous les groupes sociaux, qu'ils soient ou non constitués en Etats, soient disposés à contribuer à l'édition d'un monde pacifique. La micro-communauté et la macro-communauté sont liées par des droits et des devoirs réciproques dont le respect sert à consolider la paix.

#### **Les droits et les devoirs des minorités.**

4. - L'une des finalités de l'Etat de droit est que tous les citoyens puissent jouir d'une même dignité et soient égaux devant la loi. Cependant, l'existence des minorités, en tant que groupes identifiables à l'intérieur d'un Etat, pose la question de leurs droits et de leurs devoirs spécifiques.

Beaucoup de ces droits et de ces devoirs concernent précisément les rapports qui s'instaurent entre les groupes minoritaires et l'Etat. Dans certains cas, les droits ont été codifiés, et les minorités bénéficient d'une protection juridique propre. Mais il n'est pas rare que, même là où l'Etat assure cette protection, les minorités aient à souffrir de discriminations et d'exclusions de fait. L'Etat lui-même a alors obligation de promouvoir et de favoriser les droits des groupes minoritaires, car la paix et la sécurité intérieures ne pourront être garanties que par le respect des droits de tous ceux qui se trouvent sous sa responsabilité.

5. - Le premier droit des minorités est le droit à l'existence. Ce droit peut être méconnu de diverses manières, jusqu'aux cas extrêmes où des formes ouvertes ou indirectes de génocide le réduisent à néant. Le droit à la vie, en tant que tel, est inaliénable, et un Etat qui se livre à des actes de nature à mettre en péril la vie de ses citoyens appartenant à des groupes minoritaires, ou qui tolère de tels actes, viole la loi fondamentale qui règle l'ordre social.

kilbignat betek un Doue unan ha krouer, hag en deus, hervez stumm-komz ar Skitur Sakr, « graet diwar ur boud hepken holl ouenn an dud, evit ma vefe houmañ o chom war holl c'horread an douar ». (Ob.17 : 26) A-rakdiviz da unded gouenn an dud e ranker lakaet ez afe an denelez en he fezh, o vont dreist he rannidigezhioù e stumm gouennoù, broadoù, sevenadurioù, relijionoù, da ober ur gedunellezh hep diforc'h lakaet etre ar pobloù hag e strivfe-hi da dizhout ar gengrediezh. Diwar glask an unded e teu iveret ret ma teufe doareoù liesseurt izili tiegezh an dud da vezañ lakaet da dalvezout da nerzhекaat an unded-se, e-lec'h bezañ un abeg a rannidigezh.

#### **An dead e-keñver an disertiezh : da vezañ miret gant an holl izili eus an denelez.**

An dead da zegemer ha da zifenn al liesseurtiezh n'eo ket tra ar Stad na tra ar rummoù o-unan nemetken. Pep personenn, hervez maz eo ezel eus tiegezh nemetañ an dud, a dle meizout ha doujañ talvoudegezh an disertiezh etre-tud hag he ren war-du ar c'henvad. Un den hag a zo degemerus e spered ha c'hoant gantañ da anaout gwelloc'h hêrezh sevenadurel ar rummoù isdarnadel ma kej ganto, a zegaso skoazell da skarzañ an emzalc'hioù rakvarnus a laka diaes an darempredou yac'h e-stern ar gevredigezh. Sed un argezh hag a dle bezañ dalc'hmat kaset war-raok, peogwir ez eo douget seurt emzalc'hioù da zont en-dro war-wel, meur ha meur a wec'h, dindan doareoù nevez.

Diwar glask ar peoc'h e diabarzh tiegezh nemetañ an dud, e teu ret ma vefe diorroet, ervat ar pezh a laka diforc'h etre an hiniannoù hag ar pobloù a zo ac'hanoù, diorroet ar pezh a ya da verkañ hor personelez. Diouzh an tu all, evit a sell ouzh an holl rummoù er gevredigezh, douget da gemer perzh e labour pegete ur bed peoc'hleun da sevel. Ar gevredigezh vihan hag gevredigezh vrás a vez eret kentrezo gant gwirioù ha dleadoù, an doujañs d'ar re-mañ o talvezout da gadarnaat ar peoc'h.

#### **Dlead ar Stad dre vrás.**

4. - Unan eus pennvenozioù ur Stad reizhet hervez al lezenn eo ma c'hellfe an holl goedourion anezhi ober o rann eus an hevelep briegezh hag an hevelep kevatalded dirak al lezenn. Daoust da-se, dre berzh isdarnadoù dezhioù stumm rummoù diforc'h e diabarzh ur Stad, e tarzh kudenn o gwirioù hag o dleadoù, ar re-mañ diouto o-unan.

Meur a hini eus ar gwirioù ha dleadoù-se a zave, end-eeun, da stumm-darempred ar rummoù isdarnadel e-keñver ar Stad. E degouezhioù 'zo, ar gwirioù a vez bet savet an dastumad anezho, hag an isdarnadoù en em vata eus ur gwarez lezennel diouto o-unan. Met n'eo ket dibaot a wech, zoken e-lec'h maz eo gwarantet gant ar Stad ur seurt gwarez, e c'hell an isdarnadoù-tud bezañ gwazh eus taolioù-diforc'husted ha taolioù-distaolusted. En degouezhioù-se, ar Stad hec'h-unan a zo he dlead kas war-raok hag harpañ gwirioù ar rummoù isdarnadel, peogwir ne c'hell ar peoc'h nag an diogellded-diabarzh bezañ gwarantet nemet dre an doujañs da wirioù ar re-holl ez eo ar Stad dleadek en o c'heñver.

6. - Le droit à l'existence peut être atteint également de manière plus subtile. Certains peuples, en particulier ceux que l'on appelle **autochtones** ou **aborigènes**, ont toujours eu avec leur terre un rapport spécial qui est lié à leur identité propre, à leurs traditions tribales, culturelles et religieuses. Quand les populations indigènes sont privées de leur terre, elles perdent un élément vital de leur existence et courrent le risque de disparaître en tant que peuple.

7. - Un autre droit à sauvegarder est le droit des minorités à conserver et à développer leur culture. Il n'est pas rare de voir des groupes minoritaires menacés d'extinction culturelle. En certains lieux, en effet, a été adoptée une législation qui ne leur reconnaît pas le droit d'utiliser leur langue propre. On impose même parfois des changements dans les noms de famille ou de lieux. Et il arrive que les minorités voient ignorées leurs expressions artistiques et littéraires, et qu'elles ne trouvent pas de place, dans la vie publique, pour leurs fêtes et leurs célébrations, tout cela pouvant mener à la perte d'un riche héritage culturel. Il est également un autre droit étroitement lié à celui-ci : celui d'entretenir des rapports avec les groupes de même héritage culturel et historique qui vivent sur le territoire d'autres Etats.

8. - Je ne ferai ici qu'une brève allusion au droit à la liberté religieuse, qui a déjà fait l'objet du message pour la Journée mondiale de la paix de l'an dernier. Ce droit appartient à toutes les Communautés religieuses, et pas seulement aux personnes, et il comprend la liberté de manifester, individuellement ou collectivement, ses convictions religieuses. Il s'ensuit que les minorités religieuses doivent pouvoir célébrer leur culte de façon communautaire, selon leurs rites. Elles doivent également être en mesure de pourvoir à l'éducation religieuse par un enseignement approprié et de disposer des moyens nécessaires.

En outre, il est très important que l'Etat assure et favorise d'une manière efficace la sauvegarde de la liberté religieuse, particulièrement, lorsque, à côté d'une très forte majorité de croyants d'une religion déterminée, il existe un ou plusieurs groupes minoritaires qui adhèrent à une autre confession.

Enfin, il faut que soit garantie aux minorités religieuses une juste liberté d'échanges et de rapports avec d'autres communautés, à l'intérieur comme à l'extérieur du cadre national.

#### Gwirioù an isdarnadoù-tud : ar gwir da vezout.

5. - Gwir kentañ an isdarnadoù-tud eo ar gwir da vezout Dianzavet e c'hell ar gwir-se bezañ e meur a zoare, betek an degouezhioù gwashañ, ma teu d'e gas da get stummou di-zolo pe gorvigellek a ouennlazherezh. Ar gwir d'ar vuhez, hervez maz eus anezhañ, ne c'hell ket bezañ treuzpiaouet ; hag ar Stad a embreg oberoù diouzh doare lakaat en argoll buhez ar re eus he c'heodedourion a zo e dalc'h ur rumm isdarnadel, pe a lez kabestr gant seurt oberoù, a wall al lezenn diazez a zo o reizhañ ar vuhez kevredel.

6. - Tizhet e c'hell bezañ iveau ar gwir d'ar bezout en un doare gwidreüsoc'h. Poblou 'zo, dreist-holl ar re a vez graet anezho broiz a-viskoazh ha broiz c'henidik, poblou hag a vez bet, a-viskoazh, ur c'hevre dioutañ e-unan etrezo hag o zachenn-douar, o skoulmañ houmañ ouzh o fersonelezh o-unan, ouzh o hengounioù meuriadel, sevenadurel, relijiel. Pa vez lamet diganto o zachenn-douar, ar pobla-dou broidi a goll un elfenn buhezel eus ar bezout anezho hag a vez en arvar da vont da get, hervez ar stumm a bobl a vez dezho.

#### Gwirioù an isdarnadoù-tud : ar gwir da gaout o sevenadur.

7. - Ur gwir all da wareziñ eo gwir an isdarnadoù-tud, da virout ha da ziorren o sevenadur. N'eo ket dibaot a wech e vez gwelet rummoù isdarnadel e riskl da vezañ mouget e-keñver o sevenadur. E meur a lec'h, e gwirionez, ez eus bet lakaet da dalvezout lezen-nou hag a chom hep anzav o gwir da ober gant o yezh o-unan. A-wechoù e vez rediet an dud gemmañ anvioù o ziegezh hag o annezez. Isdarnadoù 'zo hag a vez dianzavet o doare emzisplegañ dre an arzoù hag al lennegezh, hep ma vije lezet tachenn ebet, er vuhez foran, gant o goulioù hag o lidadegoù. Ke-menant-se a c'hell o lakaat da goll un tamm brav eus o hêrezh sevenadurel. Ur gwir all a zo c'hoazh, unan skoulmet strizh ouzh hemañ : ar gwir da ren darempredou gant rummoù dezho an hevelep hêrezh e-keñver sevenadur ha diwar istorvezh, o vevañ war dachenn-douar ur Stad all.

#### Gwirioù war graf ar relijion.

8. - Amañ ne rin nemet ur meneg berr eus ar gwir d'an dieubded e-keñver relijion, peo-gwir e oa se danvez-prederiañ va C'hennedur warlene, da-geñver Liddevezh hollvedel ar Peoc'h. Ar gwir-se a dalvez evit an holl gedunelezhiou relijiel, koulz hag evit an dud a hiniennoù, hag en e blegoù emañ ar frankiz da lakaat a-wel ar c'hredennou relijiel, en doare hinienkel koulz hag en doare strollel. An isdarnadoù-tud e-keñver relijion a dle kaout an tu da lidañ o c'hehelerez en un doare kedueñzel, hervez o stumm-lidañ. Bez' e tieont iveau kaout an tu da ober war dro an diorren e-keñver relijion, dre ar stumm-kelennerez diouzh-se, ha d'en em vataat eus ar skoradurioù ret, a-benn tizhout ar pal-se.

Ouzhpenn-se, ez eo pouezus-meurbet ma veze ar Stad o lakaat dioael hag o kas war-raok ar mirout ma vez graet ar frankiz e-keñ-

9. - Les droits fondamentaux de l'homme sont aujourd'hui sanctionnés par divers documents internationaux et nationaux. Mais pour essentiels qu'ils puissent être, ces instruments juridiques ne sont pas encore suffisants pour faire dépasser des préjugés et des attitudes de méfiance profondément enracinés, ni pour éliminer des façons de penser qui inspirent des actions directes contre des membres de groupes minoritaires. Traduire la loi dans le comportement constitue un processus long et lent, surtout quand il s'agit d'éliminer de telles attitudes, mais ce processus n'en est pas moins urgent. Toute personne, et pas seulement l'Etat, a l'obligation de faire tout son possible pour atteindre ce but. Toutefois, l'Etat peut exercer un rôle important en favorisant la promotion d'initiatives culturelles et d'échanges qui facilitent la compréhension mutuelle, comme aussi de programmes d'éducation qui aident à former les jeunes au respect des autres et à bannir tous les préjugés, souvent provoqués par l'ignorance. Par ailleurs, **les parents ont une grande responsabilité**, car les enfants apprennent beaucoup en observant et sont portés à adopter les attitudes de leurs parents à l'égard des autres peuples et des autres groupes.

Il est indubitable que le développement d'une culture fondée sur **le respect des autres** est essentiel pour la construction d'une société pacifique, mais il est malheureusement évident que la mise en pratique d'un tel respect rencontre de sérieuses difficultés.

Concrètement, l'Etat doit veiller à ce que n'apparaissent pas de nouvelles formes de discrimination, par exemple dans la recherche d'un logement ou d'un emploi. Les mesures prises par les pouvoirs publics en ce domaine sont souvent complétées par de louables et généreuses initiatives d'associations de volontaires, d'organisations religieuses, de personnes de bonne volonté, qui cherchent à réduire les tensions et à promouvoir une plus grande justice sociale en aidant beaucoup de leurs frères et sœurs à trouver un emploi et un logement décent.

10. - Des problèmes délicats apparaissent quand un groupe minoritaire présente des revendications qui ont des **Implications politiques particulières**. Le groupe recherche parfois l'**indépendance** ou au moins une plus grande autonomie politique.

Je voudrais redire qu'en des circonstances difficiles de ce genre, le **dialogue** et la **négociation** sont la voie obligée pour atteindre

ver religion, dreist-holl maz eus, keñver-ha-keñver gant an darn vrasañ a heuilh ur reli-  
gion, ur rumm, pe veur a rumm, isdarnadel,  
dezhō ur feiz all.

Da ziwezhañ kraf, an isdarnadoù diwar reli-  
gion a dle bezañ gwarantet dezhō ur frankiz  
reizh a eskemmerez hag a gejadennou gant  
kedunelezhoù all, e diabarzh, koulz hag a-  
ziavaez, d'o harzoù broadel o-unan.

**Emzalc'hioù oc'h enebiñ ouzh an doujañs d'ar gwirioù-se.**

**A-benn degas kemm :**

**Iod pep hini, Iod ar Stad, Iod ar strolladoù.**

9. - En deiz a hiziv, ez eo kasedet ar gwirioù denel diazez e-barzh e-leizh a ziskleriaduriou etrevroadel ha broadel. Pegen hollbouezus bennak e c'hell bezañ an dielloù gwironiel-se, n'eus ket c'hoazh a-walc'h ganto da zont a-benn eus an emzalc'hioù, diazezet don, a rakvarnusted hag a zisfi, pe da skarzhañ doareoù-soñjal hag a gas d'an oberou troet a-enep d'ar rummoù-tud isdarnadel.

Al lakaat al lezenn da dremen e-barzh ar vuhezegezh, se a zo un hirbadus hag ur gorrek a argezh, dreist-holl paz eo gant ar ratozh da ziswiziennañ seurt emzalc'hioù her greer. Se ne laka ket an a argezh da vezañ tamm ebet nebeutoc'h a vall kregiñ gantañ. N'eo ket hepken ar Stad, met iveau pep hinienn, a zo dleet dezhō ober kement a c'hell bezañ graet, a-benn tizhout ar pal-se. Ar Stad, avat, a c'hell sevenñ un ober pouezus dre gas war-raok stummoù-intrudu e-keñver sevenadur hag eskem-madennoù oc'h aesaat ar c'henemgompren, koulz ha raktresadoù war dro an diorren, o reiñ skoazell da stummañ ar re yaouank e-keñver an doujañs d'ar re all, ha da skarzhañ an holl rakvarnadurioù a vez alies lakaet da c'hoarvezout diwar zic'houszout. A-hent-all, ez eo bras dileadegezh ar gerent, rak ar vugale a zesk kalz diwar eveshaat, ha douget e vezont da zegemer emzalc'hioù o c'herent e-keñver ar pobloù hag ar rummoù all.

N'eus arvar ebet ez eo kreskidigezh ur sevenadurezh harpet war an doujañs e-keñver ar re all un dra peurbouezus, a-benn lakaat war-sav ur gevredigezh peoc'hleun. Siwazh ! avat, ar pezh a zo anat, hiziv, eo ar stekiñ a ra al lakaat da dalvezout, e gwirionez, an doujañs-se, ouzh diaesteriou estreget dister.

War live an ober, ar Stad a rank bezañ war evezh na zeufe war wel stummoù nevez a ziforc'husted, da skouer da-geñver ar c'hlask war-lerc'h ul lojeiz pe un eienenn-gopr. War ar c'hraf-mañ, seurtoù-politikerez ar pennadurezhioù foran a vez, alies, klokaet, en un doare da vezañ meulet, gant stummoù kalonek a intrudu, a-berzh rummoù diwar emlusk, azadurioù relijiel ha tud a youl vat, o labourat da zistanañ ar stennadurezhioù ha da gas war-raok muioc'h a reizhder kevredel, dre skoazel-lañ kement a vreudeur haq a c'hoarez, a-benn kavout labour ha lojeiz dereat.

**Kudennoù war dro isdarnadoù-tud o klask an disrann pe an emrenerezh.**

10. - Kudennoù amjest a c'hoarvez, pa vez ur rumm isdarnadel o tegas klemmadurioù, gant dilerc'hioù politikel ispisial. A-wechou e

dre la paix. La disposition des parties à s'accepter et à dialoguer est un préalable indispensable pour arriver à une juste solution de problèmes complexes qui peuvent menacer sérieusement la paix. Au contraire, le refus du dialogue risque d'ouvrir la porte à la violence.

Dans certaines situations de conflit, des **groupes terroristes** s'arrogent indûment le droit exclusif de parler au nom des communautés minoritaires, les privant ainsi de la possibilité de choisir librement et ouvertement leurs représentants et de rechercher, sans intimidations, des solutions adéquates. En outre, les membres de ces communautés souffrent trop souvent des actes de violence commis abusivement en leur nom.

Puissent m'écouter ceux qui se sont engagés sur le chemin inhumain du terrorisme : frapper aveuglément, tuer des innocents et accomplir des représailles sanglantes ne favorise pas une évaluation équitable des revendications avancées par les minorités et pour lesquelles ils prétendent agir (cf. encycl. **Sollicitudo rei socialis**, n. 24) !

**11. - Tout droit comporte des devoirs correspondants.** Les membres des groupes minoritaires ont, eux aussi, leurs devoirs propres vis-à-vis de la société et de l'Etat où ils vivent, à commencer par le **devoir de coopérer**, comme tous les autres citoyens, au bien commun. Les minorités doivent en effet apporter leur **contribution spécifique** à la construction d'un monde pacifique qui reflète la riche diversité de tous ses habitants.

En deuxième lieu, un groupe minoritaire a le devoir de promouvoir la liberté et la dignité de chacun de ses membres et de respecter les choix de chaque individu, même si l'un d'entre eux décidait de passer à la culture majoritaire.

D'autre part, dans des situations d'injustice réelle, il peut appartenir aux groupes des minorités émigrés à l'étranger de réclamer le respect des droits légitimes pour les membres de leur groupe qui sont restés opprimés dans leur lieu d'origine et qui sont empêchés de faire entendre leur voix. Dans ce cas, toutefois, il faut user d'une grande prudence et d'un discernement lucide, surtout quand on n'est pas en mesure d'avoir des informations objectives sur les conditions de vie des populations concernées.

Tous les membres de groupes minoritaires, où qu'ils se trouvent, sauront poser à bon escient le bien-fondé de leurs revendications à la lumière de l'évolution historique et de la réalité actuelle. S'abstenir de le faire compor-

vez ar rumm war glask eus an emzizalc'hāñ, pe, da nebeutañ, eus muioc'h a emrenerez politikel.

C'hoant am befe da adlavarout penaos, e seurt degouezhioù amjestr, ez eo an emzivizout hag an eskemmañ-kinnigoù an hent ret mont gantañ, a-benn tizhout ar peoc'h. Youl vat ar c'hostezennou rediet da gejañ an eil gant eben ha da gomz an eil ouzh eben eo ar rakdiviz ret-e-gaout, a-benn tizhout un diskoulm reizh d'ar c'hudennoù rouestlet a c'hell, en un doare grevus, stouvañ an hent ouzh ar peoc'h. En enep da-se, diwar zisteurel an emzivizout, ez eus riskl da zigeriñ an nor d'an ober gant an drouknerzh.

E-barzh stuziòù 'zo a dabut, ez eus rummou spontembregus hag a skrap dezho o-unan nemetken ar gwir da gomz en anv an isdarnad, o lemel digant hemañ an tu da zibab, ez dieub hag ez diguzh, e zileuridi e-unan, ha da giask tizhout un diskoulm reizh a-ziavaez d'ar gourdrouzerezh. War ar marc'had, ez eus izili eus seurt kedunelezhiou hag o deus da c'houzañv, re alies, a-berzh an oberou drouknerzhel a vez sevenet, diwar falsentez, en o anv.

Salv e vefen selouet gant ar re a zo loc'het war hent enepdenel ar sponezh : skeiñ hep diforc'h, lazhañ tud dinoaz ha seviñ dialadegoù gwadus, se ne ro ket an tu mat da vuzuliañ ez reizh ar c'hlemmadurioù e vez an isdarnadoù o tispakañ hag o vennout, dre o obererezh, lakaat da vezañ degemeret. (kv. Lizher "Sollicitudo rei socialis", n. 24 = gw. ar stagadenn).

#### Dleadoù an isdarnadoù-tud.

**11. - Kement gwir a zo a ya, keñver-ha-keñver gantañ, dleadoù. Izili ar rummou isdarnadel o deus, int ives, dleadoù dezho o-unan, e-keñver ar gevredigezh hag ar Stad e-lec'h m'emaint o vevañ, o kregiñ gant an dead da genoberiañ, evel an holl geodedourion all, endro d'ar c'henvad. An isdarnadoù, e gwirionez, a rank degas o lod o-unan da genframmañ ur bed peoc'hleun, oc'h adskedin dioutañ disertiezh puilh an holl annezidi anezhañ.**

Da eil, ur rumm isdarnadel a zo dleet dezhañ kas war-raok dieubded ha briegezh pep hini eus an izili anezhañ ha doujañ da zisentezioù pep hini, zoken maz eus unan bennak o tivizout degemer sevenadur an usdarnad.

E-kreiz stuziòù a c'haoudigedh wirion, e c'hell bezañ dleet d'ar rummou o deus divroet war-du broioù estren goulen doujañs e-keñver gwirioù reizh an izili eus o rumm a zo chomet dindan waskerezh en o zachenn c'henidik hag hep tu da lakaat o-unan o mouezh da vezañ klevet. E seurt degouezhioù, ez eo dleet mont diouzh e-leizh a boellegezh hag a sklerijenn-meiz dreist-holl pa vez diaes kaout titouroù gwirdizhus a-zivout ar stuziòù kemmidigemm a vuhez m'emañ sachet enno ar poblañsou a vez meneg anezho.

Holl izili ar rummou isdarnadel, pelec'h bennak e c'hellont bezañ, a dle mont diouzh ar furnez, pa varnont dereadegezh o c'hlemmadurioù ouzh sklerijenn o stummoù-kresk e-doug o istorvezh hag ouzh sklerijenn ar pezh

terait le risque de rester prisonnier du passé et privé de perspective d'avenir.

### Pour construire la paix.

12. - A partir des réflexions qui précèdent se dessine le profil d'une société plus juste et plus pacifique, à l'avènement de laquelle nous avons tous la responsabilité de contribuer par tous les efforts possibles. Sa construction demande que nous soyons fermement déterminés à éliminer non seulement la discrimination manifeste, mais aussi toutes les barrières qui séparent les groupes. La règle doit être la réconciliation selon la justice, **dans le respect des légitimes aspirations de toutes les composantes de la communauté**. Par-dessus tout et en tout, la trame patiente qui forme le tissu d'une vie sociale pacifique trouve sa vigueur et son accomplissement dans l'amour qui enlace tous les peuples. Cet amour peut s'exprimer en d'innombrables façons de servir concrètement la riche diversité du genre humain, qui est un par son origine et par son destin.

**La prise de conscience de la situation des minorités**, qui se manifeste de façon croissante aujourd'hui à tous les niveaux, constitue à notre époque un **signe de ferme espérance** pour les nouvelles générations et pour les aspirations de ces minorités. En effet, **le respect envers celles-ci doit être considéré, en quelque sorte, comme la pierre de touche d'une convivialité harmonieuse et comme l'indice de la maturité civile atteinte par un pays et par ses institutions**. Dans une société véritablement démocratique, garantir aux minorités la participation à la vie publique est le signe d'un haut progrès civil, et cela est tout à l'honneur des nations où une telle participation est assurée à tous les citoyens dans un climat de vraie liberté.

13. - Enfin, je voudrais adresser un appel spécial à mes sœurs et à mes frères dans le Christ. Par la foi, nous savons tous, quelle que soit notre origine ethnique et où que nous vivions, que dans le Christ « nous avons les uns et les autres, en un seul Esprit, libre accès auprès du Père », car nous sommes désormais « de la maison de Dieu » (Ep. 2, 18, 19). Comme membres de l'unique famille de Dieu, nous ne pouvons tolérer entre nous des divisions ou des discriminations.

Quand le Père a envoyé son Fils sur la terre, il lui a confié une mission de salut universel. Jésus est venu pour que tous « aient la vie, et qu'ils l'aient en abondance » (Jn 10,10). Aucune personne, aucun groupe n'est exclu de cette mission d'amour unifiant, qui nous est maintenant confiée. Nous aussi, nous devons prier comme le fit Jésus à la veille de sa mort, avec ces mots simples et sublimes : « Comme toi, Père, tu es en moi et moi en toi, qu'eux aussi soient un en nous » (Jn 17,21).

ez int d'an ampoent. Chom hep hen ober a sachfe, a-c'houdevezh, ar riskl da venel sac'het e-barzh an tremened, hep kaout danvez-spi a-benn an dazont.

**Dlead an holl da ziazezañ ur gevredigezh reizhekoc'h ha peoc'hleunoc'h :**  
**an ademglev ; an doujañs kenetreek lusket gant ar garantez ; dellid ar broioù elec'h ma toujer an isdarnadoù-tud.**

12. - Diwar ar prederiadennou a-ziaraok, e weler treset an drolinenn eus ur gevredigezh reizhekoc'h ha peoc'hleunoc'h, ez eo dimp holl un dleadegezh degas hol lod a-benn he donedigezh, dre an holl strivoù en hor galoud. A-benn he sevel, e teu ret ma vetemp menet start da skarzhañ, n'eo ket hepken an diforc'husted anat, met c'hoazh an holl glouedoù a zisrann ar rummoù an eil diouzh egile. Da reolenn e rank bezañ an ademglev hervez ar reizh, gant an doujañs da holl drec'hoantou reizh an holl elfennou dalc'het er gedunelezh. A-us da bep tra hag e pep tra, ar striv kendalc'hus da lakaat war-sav ur gevredigezh peoc'hleun a vez roet dezhañ nerzh ha sevenedigezh dre ar garantez, a zastum en he c'hrog an holl bobloù. Ur seurt karantez a c'hell bezañ diskuliet e doareoù fetis ha dîniver da servijañ disertiezh puilh gouenn an dud, hag a zo unan e-keñver an orin hag ar blanedenn.

An emskiantekaat e-keñver stuz an isdarnadoù-tud, pleg oc'h en em ziskouez anat muioc'h-mui, en deiz a hiziv, war gement live a zo, a zo anezhañ, en hor marevezh, un arouez a espérañ kreñv evit ar remziadoù nevez hag e-keñver trec'hoantou an isdarnadoù-se. E gwirionez, an doujañs d'ar re-mañ, en ur c'hiz, a rank bezañ sellet outi evel ouzh un arouez-talvoudegezh e-keñver an heson maz eo ar c'henveañ hag e-keñver al live a zarevidigezh keodedadel tizhet gant ur vro ha gant hec'h ensavadurioù. E-barzh ur gevredigezh demokratel wirion, gwarantiñ d'an isdarnadoù-tud ar c'hemer perzh er vuhez foran a zo an arouez eus ul live uhel a arwellaat aberzh ar geodedourion, ha se a zo un dellid a enor d'ar broadou m'emañ kretaet enno ur seurt perzh-oberiañ d'an holl geodedourion, en un aergelc'h a zieubded wirion.

**Galvadenn d'ar gristenion : ar garantez kristen a zo unvanus hag a zistaol ar rannidigezh hag an diforc'husted.**

13. - En ur echuiñ, am eus c'hoant da gas ur c'halvadenn ispisiañ d'am breudeur ha c'hoarez ar C'christ. Pehini bennak ez eo hon orin ha pelec'h bennak emaomp o vevañ, an holl ac'hanomp a oar, dre ar feiz, hon eus holl, er C'christ, « darempred, en ur Spered hepken, gant hon Tad », en abeg maz omp deuet da vezañ « izili eus tiegezh Doue » (Ef 2:18-19). Diwar vezañ izili eus tiegezh unan Doue, ne c'hellomp gouzañv na rannidigezh na diforc'husted en hon touez. Pa gasas an Tad e Vab e-barzh ar bed, e fizias ennañ ur gefridi a silvidigezh holl dizhus. Jezuz a zo deuet, a-benn « ma c'hellfe an holl kaout ar vuhez hag he c'haout ez fonnus ». (Yn 10-10) Den ebet na rumm ebet ne deo lakaet er-maez eus ar gefridi-se a garantez unvanus, a zo

Cette prière doit constituer notre programme de vie, notre témoignage car, en tant que chrétiens, nous nous reconnaissions un Père commun qui ne fait pas acceptation de personne, qui « aime l'étranger, auquel il donne pain et vêtement » (Dt 10,18).

14. - Quand l'Eglise parle de discrimination en général, ou - comme dans ce Message - de la discrimination particulière qui frappe les groupes minoritaires, elle s'adresse avant tout à ses membres, quelles que soient leur situation ou leurs responsabilités à l'intérieur de la société. De même qu'il ne peut y avoir de place pour la discrimination dans l'Eglise, de même, aucun chrétien ne peut consciemment encourager ou appuyer des structures et des attitudes qui séparent des personnes d'autres personnes, des groupes d'autres groupes. Ce même enseignement doit s'appliquer à tous ceux qui ont recours à la violence et qui la soutiennent.

15. - En conclusion, je voudrais dire aux membres de groupes minoritaires qui ont à souffrir que je suis proche d'eux par la pensée. Je connais leurs moments de douleur et leurs motifs de légitime fierté. Je prie pour que leurs épreuves cessent rapidement et que tous puissent jouir en toute sécurité de leurs droits. Pour ma part, je demande le soutien de la prière afin que la paix que nous cherchons soit toujours davantage la vraie paix, édifiée sur la « pierre d'angle » (Ep 2,20) qu'est le Christ lui-même.

Que Dieu accorde à tous sa bénédiction, avec les dons de sa paix et de son amour !

Du Vatican, le 8 décembre 1988.

IOANNES PAULUS PP II

bet, bremañ, fiziet ennomp. Ni a dle iveau pe-diñ evel ma reas Jezuz derc'hent e varv end-eun, gant ar gerioù-mañ eeun ha peurhael : « Tad, ra vezint unan ennomp, evel m'emaoc'h-c'hwi ennon ha m'emaon-me ennoc'h ». (Yn 17:21).

Ar bedenn-se a dle bezañ roll-labour hor buhez, hon testeni, peogwir, Kristenion ac'h-anom, ez anzavomp hon eus un Tad boutin etrezomp hag a chom hep ober diforc'h etre an hiniennou-tud, « karout ma ra an diavaeziad, o reiñ dezhañ boued ha dilhad ». (Adl 10:18).

14. - Pa ra meneg eus diforc'husted, hag, evel ma ra er C'hemennadur-mañ, eus an diforc'husted diouti hec'h-unan a dizh ar rummoù isdarnadel, an lliz a gomz ouzh hec'h izili hec'h-unan da gentañ-penn, pehini bennak ez eo o renk pe o dleadegezh er gevredigezh. Ken gwir ha na c'hell bezañ lec'h ebet d'an diforc'husted e diabarzh an lliz, ken gwir all eo n'eus Kristen ebet hag a c'hellje, o c'houzout dezhañ, harpañ pe c'houzañ frammadurioù pe stummoù-emzalc'h hag a laka rannidigezh, diwar zireizhded, etre tud a-hiniennou pe a-rummoù. An hevelep kelennadurezh a dle bezañ lakaet da dalvezout d'ar re a glask rekour en drouknerzh, pe a ro harp dezhi.

#### Pedenn ar Pab evit an isdarnadoù-tud gwasket ha doanlet.

15. - En ur glozañ, e karfen diskuliañ an tost m'en em lakaan a spered d'an izili-se eus ar rummoù isdarnadel a zo e-kreiz ar boan. Anaout a ran ar mareoù a zoanidigezh a zeu dezho hag an abegoù o deus da fougeal ez reizh. Va fedenn eo ma teufe dizale ehan d'o zrubaillou ha ma c'hellfent holl bezañ diogel oc'h en em vataat eus o gwirioù. Me, d'am zro, a c'houlenn ma vefe pedet, evit ma c'hello ar peoc'h a glaskomp bezañ muic'h-mui ur peoc'h gwirion, lakaet war-sav war ar « maen-korn » maz eo ar C'hrist e-unan. (kv. 2:20-22).

Ra vezo Doue o vennigañ pep unan gant an donezon eus e beoc'h hag eus e garantez !

Eus ar Vatikan, d'an 8 a gerzu 1988

YANN-BAOL II, Pab

## stagadenn

An arroud eus "Sollicitudo rei socialis", n. 24 meneget en n.10 :

« N'eus tu ebet mui da chom dall e-keñver ur poanius a c'houli d'ar bed a hiziv : an degouezhiad maz eo ar sponterezh, meizet hervez maz eo ar mennad da lazhañ ha da zismantrañ, hep diforc'h, an dud hag ar madoù, ha da grouiñ, end-eeun un aergelc'h a spont hag a ziouer-gwarez, en ur lakaat, alies, ouzh-penn-se, ar skrapañ gouestlidi. Zoken pa zegaser da bennabeg d'an doare-ober-se enep-denel ur c'henframad-menoziou (ideologiezh), pehini bennak ez eo hemañ, pe ar ratozh da sevel ur gevredigezh welloc'h, ne vez morse ar spontadegoù e tro da vezañ reizhelaet (la-

kaet da glotañ gant ar reizh). Nebeutoc'h c'hoazh e vezont, pa vez pal ar seurt divizadennoù (décisions) hag oberou, - hag a zeu a-wechoù da vezañ gwir lazhadegoù, koulz ha skrapadennoù 'zo a dud dinoaz hag ermaez d'an tabutoù, - pa vez ar pal da-se ober brud a-du gant an dael a zifenn, pe, gwashoc'h c'hoazh, pa vez an oberoù-se ar pal dezho o-unan, ken e lazher netra nemet gant ar c'hoant-lazhañ. Dirak seurt euzhusted ha kement a boanioù, ar c'homzoù am eus distaget, un nebeud bloavezhoiù 'zo hag a garfen adlavarout c'hoazh, a chom ganto o zalvoudegezh klok : "Berzet eo gant ar gristeniez ar mont gant hentoù ar gasoni, al lazhañ tud dizifenn, doareou ar sponterezh ». (Homelienn e-kichen Drogueda en Iwerzhon, 29-9-79).

Ar C'handardinal Etchegaray, Kadoriad ar Bodad-merañ pabel "Reizhded ha Peoc'h", o lakaat war ziskouez an diell babel, d'an 9-12-88 :

« Ar wech kentañ eo d'ar C'helennerez sakr gouestlañ un diell d'ar gudenn-se nemetken.

« N'eus, koulz lavarout Stad ebet, dre ar bed, ha n'he dije ket da dalañ, e doare-pezoare, ouzh planedenn an isdarnadoù-tud. Gourdrouzou grevus-brav e-keñver ar peoc'h, ken e diabarzh ar vro, ken etre broioù, a zeu eus an terriñ ma vez graet gwirioù reizh rummoù isdarnadel a zo... Ar C'hemennadur n'eo

ket buket ez diforc'h etrezek Stad ebet, met an holl Stadoù a dle santout ez int goulenntaet, ken evit pourvezañ gwarez da wirioù an isdarnadoù, ken evit kas war-raok stummoù liesseurt a intrudu kevredel pe diorroadurel (pe : desavadurel), a-benn aesaat ar c'hendivizout hag ar c'henemgompren »... « Ar gristenion a dle bezañ pennembregion an oberenn-se war dro ar peoc'h »...

« Bez' ez eo ur C'hemennadur e-lec'h maz a er gont an holl c'herioù anezhañ, unan hag a dle bezañ kemeret e-doare ur pezh... »

**Ma Fell deoc'h ren ur vuhez kristen e brezhoneg,**

**kemerit perzh en obererez an daou strollad-mañ :**

#### KRISTENIEN BREIZH

**Paol Kalvez, LEZ HINOG**

**Paimpont 35380 PLÉLAN-LE-GRAND**

Tél. 99.07.85.03

#### BELEIEN BREIZH

**Yann Talbot, presbital**

**22110 ROSTREN**

Tél. 96.29.01.55

#### STAGADENN da IMBOURC'H

Niverenn 226.

CPAPP 50 015. Priz : 3 lur

Rener ar gelaouenn : Y. OLLIVIER.

